

KANNAOIG

Imbourc'h



Kelaouenn *Emglev An Tiegezhioù* niv. 99 Genver - C'hwevrer 2017 Priz : 3€

Evit barilhadoù tireoul e werzhjont Europa d'an Islam

A-raok kregiñ gant ar pennad-skrid-mañ ha reiñ dezhañ un talbenn azasaet, em boa soñjet da gentañ en Esaou, er Bibl, a werzhas e wir henawelezh d'e vreur Jakob evit ur pladad ferennoù (Gen 25: 27-34), met war-lerc'h em boa soñjet muioc'h e film Sergio Leone, "*Bez' e oa ur wech er c'hornog*", ma-z eus e-barzh un eilgeriadenn a genglot ivez, mui pe vui gant talbenn va fennad hag ivez danvez ar film, dre geñveriañ.

Ur film Western eo oberenn Sergio Leone, gant tennoù pistolennoù e-leizh ha muntroù o teverañ diouto, hervez lezenn an doare. C'hoarvezout a ra an istor war-dro ur ranch, anvet *Sweetwater*, ma-z eus ennañ un eienenn dour, ha ma vez dedennet ganti tud ur gompagnunezh sevel hentoù-houarn, dre ma-z eus ezhommm dour evit lakaat arwelañ ar stlejerezhioù dre vurezh. Bez' e tlefe tud an

hent-houarn digoll perc'henn ar ranch evit e zour gant ur sammad mat a zollaroù, hogen Frank, an hini karget eus **an difraeoù-se** - e roll c'hoariet gant Henri Fonda - a gav gwelloc'h drouklazhañ ar rancher MacBain hag e vugale, evit ober e vad eus an dour, hep diyalc'hañ dollar ebet. Intañv e oa ar rancher, met addimezet en doa ur miz a-raok gant ur plac'h en doa kejet ganti en Orleans-Nevez. E-pad m'edo ar verc'h hag he breur yaouankañ o prientiñ an daol evit pred-degemer pried nevez o zad hag a zlee dont dres **d'an deiz-se** dre an tren, en em brient an tad da vont d'he c'herc'hat d'an arsavlec'h hent-houarn e *Flagstone*, gant e vab henañ. D'ar mare-se eo ma tegouezh Frank hag e lazherion ha ganto e vezo drouklazhet an tiegezh a-bezh, an tad, ar verc'h hag an daou vreur, hep disoñjal lezel merkoù da damall

ar forban Cheyenne (Jason Robards) hag e vandenn evit al lazhadeg-se.

Bremañ e kred penngoprlazher ar Morton Company e c'hello hiviziken e gompagnunezh perc'hennañ ar ranch hag an dour hep kudenn ebet, hogen ne oar ket e oa nevez-addimezet Peter MacBain. Diskenn a ra Jill ar bried nevez (Claudia Cardinale) diouzh an tren e Flagstone, deuet dre al linenn nevez-savet, met n'eus den ebet ouzh he gortoz, evel-just. Feurmiñ a ra ur garrigell gant kezeg ha mont betek Sweetwater da adkavout he gwaz, met duhont ne gav nemet kelan MacBain ha re e vugale lazhadeg. Daoust da se ne zistro ket da Flagstone, aozañ a ra sebeliadur an tiegezh MacBain ha divizout a ra chom e Sweetwater, peogwir ez eo bremañ perc'hennet ar ranch. .

C'hwitet eo evit Frank enta ; da adober eo an taol. Kas a ra neuze daou eus e c'hoprlazherion da lazhañ Jill, met lazhet ez int a-raok gant paotr e harmonika (Charles Bronson), un den en deus ur gudenn gozh da renkañ gant Frank. Kinnig a ra Harmonika e skoazell da Jill. Koulskoude e teu Frank a-benn da rediañ Jill da werzhañ *Sweetwater* dezhañ en ur werzh diouzh ar c'hresk en ostaleri Flagstone, met ur werzh falset eo rak gwazed Frank a glask herzel ouzh fermerion ar c'hornad da geraat er werzh-se, war begozh o fistolennoù.

Evit herzel memestra ouzh ar gompagnunezh hent-houarn, da lakaat he c'hrabanoù war ranch MacBain, ez ijin Harmonika ha Cheyenne, unanet evit an degouezh, un dunembregadenn ijinek a-walc'h. D'ar poent dik ma oa darev ar prizacher da zebazhañ



Sweetwater da Frank evit ur priz dister, e klever ur vouez a ginnig 5000 dollar, hag e weler o tiskenn gant skalier an ostaleri, Harmonika, ur bistolenn en e zorn ha dirazañ Cheyenne, ar forban ma oa tamallet dezhañ, e gaou, war-lerc'h itrikoù Frank, da vezañ drouklazhet MacBain hag e vugale. Goulenn a ra ar sherif : “Ganeoc’h emañ ar pemp mil dollar-se ?” hag Harmonika da respont : “Ur priz 5000 dollar a zo war penn an den-mañ !”, pep hini en deus komprenet e lakae ar priz evit prenañ Sweetwater”. Neuze e ra Cheyenne an eilgriadenn-mañ : “Un den anvet Judaz en doa kavet e oa trawalc’h tregont dollar evitañ !”, war se e respont Harmonika : “Ne oa ket dollaroù en amzer-se !” Neuze ez eilger Cheyenne : “Hogen, mibion gisti, sur e oa diouto !”

Graet em eus dave da film Sergio Leone, da gentañ en abeg da eilgeriadenn Cheyenne : “Hogen, mibion gisti, sur e oa diouto !”, rak en istor emañ o vont da gontañ deoc’h ez eus un toullad mibion gisti, kiriek eus hor gwalleurioù a vremañ ; d’an eil ez eus en istor-se evel e film Sergio Leone un danvez priziuz, a zo abeg ar stourm etre an dud kensellet. Gant ar film ez eo an dour, gant va istor ez eo an tireoul¹. Evit an dour eo bet arveret an nerzh garv hag en diwezh e tal an atebion² priz o zorfed, evit an tireoul ez eo an enep-kaer, arveret eo bet al laoskentez gant an atebion hag ez eo d’ar re all hiziv, paeañ evit o laoskentez.

D’an 3 a viz Du 2016 ez embanne al lec’hienn Breizh-Info.com, ur pennad talbennet “*Perak en em lez Europa da vezañ aloubet gant ar yoc’hadoù islamek ? Alain Wagner a respont d’ar goulenn gant prouennoù kadarnaat*”. Gant ar pennad e oa div video : unan gant Alain Wagner, kadoriad an ICLA (*International Civiles Liberties Alliance*) hag eus an UDCC (*Union de défense des citoyens et contribuables*) hag a zispleg ar pezh emañ o vont da grennañ pelloc’hik, hag unan all gant Alexandre del Valle dazaterset gant Thierry Ardisson, hag a ginnige e levr “*Les vrais ennemis de l’Occident, du rejet de la Russie à l’islamisation des sociétés ouvertes*”, hag a lavare traoù tost heñvel. Adkavet e vez dazaters Alain Wagner war lec’hiennoù all evel *Riposte laïque* hag *Fdesouche.com...* hag heñvel evit Alexandre del Valle.

Bez’ e savfe an istor da Vrezel ar Yom Kippour (eus ar 6 d’ar 24 a viz Eost 1973) etre Israel hag Egipt ha Siria kevredet. Trec’het e oa bet armeoù Egipt ha Siria. Tamallet e oa bet d’ar broioù kornogat, gant ar broioù muslimat, da vezañ skoazellet Israel, dreist-holl ar Stadoù Unanet. Darbaroù dialgerc’h³ a voe kemeret gant ar broioù muslimat all, a oa kengret⁴ da Egipt ha Siria en anv o c’henorin arabiat hag o feiz

¹ Tireoul : *pétrole*.

² Atebeg : *responsable*.

³ Darbaroù dialgerc’h : *mesures de rétorsion*

⁴ Kengret : *solidaire*.

vuslimat. Arveret e voe neuze arm an tireoul. An OPEP, ma-z eus ennañ broioù muslimat dreist-holl, a zivizas a-daol-trumm, pevarc’hementiñ priz an tireoul, hag e voe renket ganto ar broioù e tri rummad : mignon, neptu, pe enebour, e-keñver Israel evel-just ; Skrapvac’het⁵ e oa ar broioù kornogat, europat dreist-holl, rak emvastus a oa Amerika e-keñver an tireoul. Ur stad evel an Izelvroioù en em gavas penn da benn dindan embargo. Dizale e voe aozet ur vodadeg d’ar 6 a viz Du 1973 e Barcelona e Katalounia (Protokol Barcelona) etre an nav bro eus Kumuniezh Europa ar mare, ha broioù muslimat an OPEP, evit diluziñ ar gudenn. Er vodadeg-se e voe groñsembannet o divizoù gant ar broioù muslimat : kedanavedigezh⁶ ar bobl balestinian, steudadur Europa war savboent arabiat e-keñver Israel, hag ensavadur an dialog europat-arabiat, a-benn liammañ muioc’h Europa gant ar bed arabiat-muslimat. En enep da dagadeg Irak tregont vloaz diwezatoc’h evit un abeg faos (bezañs armoù distruj a-yoc’h er vro) e oa un abeg gwirion er mare-se da dagañ Arabia Saoudat ha broioù ar Plegmor a oa e penn ar iarienn, ar gobidell, evit ober dezho plegañ, pe d’an nebeutañ gourdrouz anezho d’henn ober. Ne reas netra an Europiz, asantet e voe pep tra ganto evit ma vefe addigoret ar buanañ ar gwellañ tuelennoù an tireoul. Gwintañ a reas neuze Europa er c’hamp arabiat.

An hini gwallsiekañ eus an divizoù-se a voe marteze ensavadur an DEA (Dialog europat-arabiat) rak an Europiz a gevraoue⁷ gant tud ur sevenadur all a oa mistri war ar c’hevraouiñ. Ur bloaz hanter e padas ar c’hevraouadegoù-se a-raok bezañ gourfennet gant tarvennegezhioù⁸ Strasbourg (7 a viz Mezheven 1975), bet asantet ha sinet gant 200 kannad europat, izili diwar an holl strolladoù politikel europat. En tarvennegezhioù-se e oa dreist-holl tri sturiad bras :

1 - Staliadur ur politikerezh tuta nerzh-labour er broioù maghreat (hervez Alain Wagner e voe goulennet an dra-se gant an Europiz o-unan, dreist-holl ar Velgiz hag ar C’hallaoued). Al labourerion dutaet-se a c’hello ober o mad eus an hevelep gwirioù sokial ha politikel hag ho labourerion deoc’h. Ingalded a-grenn etrezo.

2 - An dud-se hag a yelo d’en em staliañ en ho proioù, n’int ket evit dont da vezañ evel doc’h. Mont a raint d’en em staliañ en ho proioù, hogen chom a raint ar pezh ez int, ha chom a raimp e liamm ganto. E komzoù all, e vevo hor c’humuniezhoù muslimat en o proioù, hervez hon doareoù, hag e vezint heuliet ha renet ganeomp. Diouzh an tarvennegezhioù-se eo bet deveret an adstrollañ tiegezhel (deved eus an 29 a viz Ebrel 1976, sinet gant Giscard ha Chirac), savidigezh ar moskeennoù, ar skolioù islamek,

⁵ Skrapvac’het : *pris en otage*.

⁶ Kedanavedigezh : *reconnaissance*.

⁷ Kevraouiñ : *négocié*.

⁸ Tarvennegezh : *résolution*.

staliadur kigerdioù halal, ar merc'hed o tougen ar ouel (hidjab, nikab, jilbab, hayek, haïk, tchador, burka, burkini...) hag ar wazed o tougen kamis, djellaba, chachiya...

3 - Ret e vo deoc'h degas en ho lezennadurezh un danevellañ a-zivout an Islam hag a heulio ar reolennoù-mañ : ur parzh kevanek⁹ ouzh hoc'h Istor ez eo an Islam, hag ur parzh yaek gant staliadur kreizennoù sevenadurel arabek e pep kêrbenn eus ho proioù ha kelennadur an arabeg. Aze e welomp perak ez eus bet diegi gant kannaded europat da enskrivañ e Bonreizh Europa orin kristen he sevenadurezh, an arlevier gall Jacques Chirac o tiskleriañ e oa sevenadurezh Europa ken islamek ha kristen, ha bremañ ar Varokadez Najat Belkacem, maodiernez an Deskadurezh vroadel e Bro-C'hall, a c'houlenn e vefe kelennet an arabeg er skolioù gall. An emglevioù-se, bet sinet e 1975, emaomp ganto hiziv, a lavar Alain Wagner.

Tost kement-se a oa bet dezrevellet endeo gant ar skrivagnerez vreizhveurat a orin yuzev ha bet ganet en Egipt, Bat Ye'or ("Plac'h an Nil", anv-pluenn Gisèle Littman-Orebi) en he levr "*Eurabia, l'axe euro-arabe*", publiket en 2009, Embannadurioù *Jean-Cyrille Godefroy*. Sklaer eo eviti, pleget o deus an Europiz dirak darvennadou¹⁰ an Arabiz evit gwarantiañ o pourvezadurioù tireoul. Levezonet eo bet un tammig he skridoù marteze, en abeg d'he orin yuzev, met d'am soñj e chom spiswel a-walc'h he foellataerezh. Skrivet he deus ul levr all war gudenn islamidigezh Europa : "*L'Europe et le spectre du Califat*". Bez' e tiskouez el levr-se obererezh politikel an OCI (*Organisation de la Conférence Islamique*) er C'hornog. Ar brasañ aozadur etrevroadel ez eo an OCI war-lerc'h an ABU (ONU), a vod 56 Stad hag a c'houarn 1,3 miliard a dud. Deuet eo a-benn an OCI da ziazezañ en tu all d'an harzoù ur gwir c'houarnerezh war ar minorelezhioù muslimat enbroet en Europa. En ur rediañ an enbroidi da chom liammet strizh gant o relijion, o yezh, o sevenadur hag o Stadoù-orin, e tevoud an OCI c'hwitadenn ar patromoù kornogat a enframmadur, hag e vez kaset evel-se Europa war-zu al liesstuzegezh¹¹, ar pezh a oa ar pal klasket evel-just.

Ur vombezenn eo ar c'heleier-se hag a zlefe bezañ korvoet gant ar meziennoù, seul-vui m'emaomp er mare-mañ en ur c'houlzad dilennel, e Frañs d'an nebeutañ, hag e vez anv eus enbroerezh gant darn eus an danvez-prezidanted, hogen gwelloc'h e kavont komz eus gobidell Penelope Fillon pe eus hini Marine Le Pen. Ar re a gomz memestra eus an enbroerezh dreist-muzul ouzh hon aloubiñ (met hep diskuliañ gwech ebet an drouktunerezh¹² a zo bet

etre 1973 ha 1975 gant ar Vuslimiz en abeg d'an tireoul), a gomz evit netra pe ne fell ket dezho lakaat en arvar o strollad politikel a oa perzhiek er gobidell-se, muioc'h eget ugent vloaz 'zo bremañ. Pa brederier mat, e c'heller stadañ e c'houzañv Europa (lakaet ermaez broioù evel Hungaria, Polonia, Tchekia... bet gwechall dindan yev an Unaniezh Soviedel) un doare azonaz¹³ Stockholm e-keñver ar Vuslimiz. Ober a ra emholc'h ar c'hourzhmonedourion¹⁴ a glask gouzaviñ ar c'hevredig a-zivout an dañjerioù ouzh hor begozhiñ gant un Islam alouber. Degas a ra anezho dirak al lezioù-barn, hag e samm anezho gant telloù-kastiz pounner da baeañ, evit ober dezho tevel. E keit-se ne baouez ket da embann ez eo kembezus¹⁵ an Islam gant sevenadur Europa (gant ar Republik, evel ma lavar ar C'hallaoued), pa ouezer n'eo ket, tamm ebet. Ur skouer etre reoù all : Amanda Lindhout, ur ganadianez kelaouennerez *free-lance*, bet skrapet gant ur strollad djihadourion islamek e Somalia a voe prizoniet ganto e-pad 460 devezh, keit ha ma ne veze ket talet an daspren. Evit kavout un dachenn dialog gant he skraperion hag un dor diflip, he deus goulennet kanttreiñ d'an Islam. Desket he deus ar pedennoù, an testennoù, meizadoù an Islam... Met poan kollet eo bet, gwallet e voe gant e skraperion, hervez souratenn 23 ar C'horan a aotre an darempredoù revel gant ar sklaved. An destenn-se ne voe ket dislavaret gant daou imam eus Kanada, bet aterset ganti un wech dieubet ha distroet en he vro (*Valeurs Actuelles 2 C'hwevrer 2017 p. 35*). Dornha-dorn e kerzh darblegidigezh¹⁶ ha *politically correct*.

Dont a ra war va eñvor ar c'hrennlavar o doa ijinet ar C'hallaoued da vare enkadenn an tireoul, ha klevet aleizh-kof : "*E Bro-C'hall n'hon eus ket tireoul, hogen kealioù hon eus*". Rannet e oa ar c'healioù-se gant an Europiz all. Danvezel rik e oant avat (gwarantiañ pourvezadurioù tireoul Europa) pa oa a spered relijiel mennozhioù an Arabiz. Evel ma lavar Bat Ye'or, n'eo ket bet renet ar c'hevraouadegoù hervez boazioù ar gwir european met hervez hini ar gwir muslimat, hini an Dawa (kalvezerezh abostolerezh relijiel arveret gant ar Vuslimiz evit astenn o zachenn skignañ), e sell da ganttreiñ Europa d'an Islam. Gwelloc'h e vije bet d'an Europiz studiañ pizh ar C'horan hag an haditoù a-raok sinañ, met n'o deus ket graet ! "Pa fell da unan bennak koaniañ gant an Diaoul ez eo ret dezhañ henn ober gant ul loa hir", eme eur c'hrennlavar. Atav spletus ez eo adlenn ar c'hrennlavarioù ! N'int ket dre ret koñchennoù gwrac'h kozh !

Donwal Gwenvenez

⁹ Parzh kevanek : *partie intégrante*.

¹⁰ Darvennad : *exigence*.

¹¹ Liesstuzegezh : *multiculturalisme*.

¹² Drouktunerezh ; *chantage*.

¹³ Azonaz : *syndrome*.

¹⁴ Gourzhmonedour : *contrevenant*.

¹⁵ Kembezus : *compatible*.

¹⁶ Darblegidigezh : *sousmission par contrainte*.

Aozerien "Ar Bibl Santel"

I. Maodez Glanndour

En deizioù-mañ em eus echuet adlenn evit an embann ar Bibl katolik klok kentañ en hor yezh.

Da gentañ e felle da Job Lec'hvien kempenn ur Bibl gant Testamant Nevez Al Liamm ha pemp levrenn Testamant Kozh an Tour-Tan, un droidigezh ger-hager diwar an hebraeg. Buan e teuis a-benn da gendrec'hiñ anezhañ e oa ret doujañ ouzh ar pezh a c'houlenn an Iliz : klotañ gant urzh ar Bibl Latin katolik, a zo an Nova-Vulgata, diwar an droidigezh c'hresianek eus ar Bibl, a anver ar Setuaginta. Maodez Glanndour en doa diazezet e droidigezhioù war ar Septuaginta, en ur zerc'hel kont eus an hebraeg, evel ma c'houlenn an Iliz.

E-pad an hañv 2013 e voe luc'hskeudennet 924 pajennad eus labourioù Maodez Glanndour, gant bennozh ar gevredigezh "Eñvor Maodez Glanndour", perc'henez war an dielloù-se, bet fiziet e gwarez KDSK Gwened. Ha neuze e stagjomp da skriverezañ pep tra. Ur mell labour.¹⁷



E miz Eost 2014 e skrive Job Lec'hvien din. Setu amañ da heul un arroud eus e lizher :

*"Keneil kêr,
(...) Va soñj abaoe pell a zo bet sikour da embann levrioù ar Bibl e brezhoneg hag en em harpañ evit-se war al labourioù priziuz kaset da benn gant an araogerien. Maodez Glanndour, Marsel Klerg, Pêr*

¹⁷ Luc'hskeudenn eus dibenn an eil brezel-bed eus beleien eus korn-bro Lannuon. Ur merker-pajenn e oa, uzet dre forzh servijañ, en unan eus peder levrenn breviañ Vatikan II e latin an Aotrou Klerg.

Adalek an tu kleiz hervez hon enklask gant Yves le Breton, beleg : 1. (?) Guillaume Renan ; 2. Loeiz ar Floc'h-Maodez Glanndour, kure e Gwengamp d'an ampoent ; 3. (?) Tad A. Ar C'halvez ?) ; 4. Louis Ar C'halvez Person-dean Lannuon d'an ampoent ; 5. (?) dirak ; 6. Francis Barbu, kelenner er C'hloerdi bras, a vo eskob Kemper e 1968 ; 7. Marsel Klerg, stouet un tamm, bet kure e Kemper-Gwezenneg betek 1942, kure e Ploubêr d'an ampoent ; 8. Armañs ar C'halvez, eus Kemper-Gwezenneg marteze eo al luc'hskeudenn da geñver e velegiezh (31 Meurzh 1945) peogwir emañ er c'hreiz, un aer sirius warnañ, harpet a bep tu gant tud e liamm gant e barrez, e-lec'h e oa bet lazhet ar person anezhi, Pêr Mari Lec'hvien nav miz a-raok gant Rezistañserien ; 9. Yves Le Saint, eus Kemper-Gwezenneg ; 10. (?) Henri Mordellès, eus Sant-Ke-Perroz ; 11. (?) Yves Prat, eus Plougousskan.

ar Gall : un utopienn marteze ? Ne gredan ket e vefe ret gortoz bloavezhioù evit aozañ un destenn dalvoudus en hor yezh eus ar pezh en deus lavaret Doue da holl bobloù ar bed krouet gantañ. Un teñzor ken pinvidik eo Komz an Aotrou Doue, ma vije un druez rediañ ar Vretoned da glask er yezhoù all ar pezh o deus ar gwir da lenn ha da glevout e yezh o bro.

Un daeadenn eo moarvat klask diskleriañ en un doare peurvut pinvidigezh Komz Doue gant troioù-lavar ken skort mab-den (...).

Piv a ray al labour-se ? Ar c'hengor etre-eskoptiel ? Kemeret em eus perzh ur wech pe ziv en emgav e Gwareg [ar c'hengor etreeskoptiel evit al liderezh],

met nebeut esper am eus da c'hortoz un disentez efedus evit kinnig un destenn da vat eus levrioù ar Bibl. EAT a c'hellfe neuze sammañ al labour-se war e gont gant an holl deulioù en deus en e gerz : setu va soñj.

(...) Gant va gwellañ sonjoù, Job Lec'hvien"

Abaoe bloaz hon eus

kelaouet pennadurezhioù an Iliz e Breizh diwar-benn ar Bibl-mañ, ha, ma fell dezho he c'hemer evel Bibl diazeñ levrioù nevez al liturgiezh a c'houlenn Roma.

Arabat eo d'ar yar kanañ a-raok bezañ dozvet he vi : n'eus netra war-wel evit poent. Goude tremenvan hor mignon Job Lec'hvien, ezel gredus eus hon Emglev, hon eus kendalc'het da labourat da ginnig ur Bibl katolik dereat d'hor c'henvroiz brezhonegerien.

War-bouez un dornskrid bennak echuet gant Maodez Glanndour a-raok dezhañ tremen e 1986, ha na oa ket skriverezet brav c'hoazh evit goulenn evito Nihil Obstat an Iliz, an holl destennoù o deus pep a imprimatur. Setu amañ da heul, dre ar munud ar mammennoù o deus servijet da sevel ar Bibl-mañ :

Mammennoù "Ar Bibl Santel" E.A.T.

Pentateuk, Josoua : An Tour-Tan + Liderezh Klerg 1971 (testennoù a gaver el liderezh bet troet gantañ).

Barnerien : Da ziazez, un dornskrid kavet e aferioù Maodez Glanndour (abeg hon eus da soñjal ez eo Klerg evit gwir), gwellaet o keñveriañ gant hebraeg An Tour-Tan + Liderezh Klerg 1971.

Rout : An Tour-Tan da ziazez + gwellaet gant troidigezh MG + Liderezh Klerg 1971 (anat eo ec'h anaveze labour MG).

Samouel, Rouaned, Danevelloù, Ezras, Nehemias, Tobit : An Tour-Tan + Liderezh Klerg 1971.

Judit : An Tour-Tan. Ar vamm-skrid gresianek troet gant MG a zo re bell diouzh testenn an Nova-Vulgata.

Ester : Maodez Glanndour.

Makabeed I : An Tour-Tan da ziazez + Liderezh Klerg 1971.

Makabeed II : Troidigezh gant Klerg + keñveriet gant hebraeg An Tour-Tan + Liderezh Klerg 1971.

Job : Maodez Glanndour ha Gwilherm Dubourg.

Salmoù : Maodez Glanndour adwelet gant Paol Kalvez ha gant Job Lec'hvien.

Krennlavarioù, Kohelet, Kanenn ar C'hanennoù, Furnez Salomon, Furnez Ben-Sirak, Izaias : Maodez Glanndour.

Jeremias : adalek ar pennad XI gant Maoris ar C'hollo, adwelet gant Maodez Glanndour.

Klemmganoù, Barouk, Ezekiel : Maodez Glanndour.

Daniel : Pêr ar Gall, adwelet gant Bourdellez, adwelet gant Maodez Glanndour, keñveriet gant an Tour-Tan. + Liderezh Klerg 1971.

An 12 profed bihan : Maodez Glanndour. (Habakouk, Hodia Joel, Yona e Kenlabour gant Klerg), adlennet gant Job Lec'hvien.

Aviel Sant Mazhev : An Tad Medar, adwelet gant Maodez Glanndour, adwelet gant Job Lec'hvien.

Avieloù St Mark, St Lukaz, St Yann : Klerg adwelet gant Maodez Glanndour.

Oberoù an Ebestel : Maoris ar C'hollo adwelet gant Maodez Glanndour.

Lizhiri : Klerg adwelet gant Maodez Glanndour.

Diskuliadur Sant Yann : Maodez Glanndour.

Adlennet eo bet pep testenn gant Job Lec'hvien.¹⁸

Maodez Glanndour : Tregontvet deiz-ha-bloaz e dremen van.

Daou-ugent vloaz a oa d'ar 25 a viz Du 1986 e oa aet Loeiz Ar Floc'h pe "Maodez Glanndour" da Anaon (1909-1986). Un digarez ouzhpenn eo an deiz-ha-bloaz-mañ d'ober un tamm studiadenn war an den-mañ, en doa renet raktres "Ar Bibl Santel".

Mab e oa d'un noter brezhoneger eus Pontrev hag e voe savet e galleg. Ar yezh a zeskas evelkent en ur c'hoari gant e gamaladed diwar ar maez hag ivez e-pad an ehanoù-skol er Merzher-Gwengamp. E Sant Jozef Lannuon e reas e studioù betek ar vachelouriezh. Eno e reas anaoudegezh gant Pêr Bourdellez.

Er c'hloerdi bras ha dreist-holl e-pad e goñje eo e tonaas e anaoudegezh eus ar yezh, en ur lenn ar gelaouenn Breiz gant Erwan Ar Moal, emezañ. Er c'hloerdi bras e Sant-Brieg e reas anaoudegezh un nebeudig gant Meven Mordiern, ha gant Vallée dreist-holl. Sikouret en doa anezhañ da sevel rolloù

¹⁸ Adlennet eo bet pep tra ur wech all ganin ivez.

gerioù war ar brederouriezh¹⁹. Beleget da 23 bloaz, e reas buan anaoudegezh gant an Aotrou Perrot, o vont war varc'h-houarn betek Skrigneg. Diwezhatoc'h ez eo ennañ e vo fiziet soutanenn merzherenti Abostol Feiz-ha-Breizh : e vab speredel e oa eta. Roparz Hemon ivez a anavez mat, ken abred ha 1936. An Aotrou beleg Louis Le Clerc (1861-1944) ivez : ar yezhadurour, hag a ozer "*Ma beaj Jeruzalem*". Studioù a reas e Roma e kloerdi bras Sant Loeiz hag e tapas eno un aotreegezh war ar Feizoniezh. Eno eo e reas anaoudegezh gant Pêr-Yann Nedeleg eus eskopti Kemper. Gantañ, hag eñ bet anvet da gelenner e Sant-Jozef Lannuon etre 1935 ha 1939, e savas ar gelaouenn Studi-hag-Ober, da Nedeleg 1936. O fal a oa labourat da adc'hanedigezh ar yezh war an dachenn relijiel : treiñ ar Bibl, al liturgiezh, krouiñ ur yezh evit ar brederouriezh hag ar feizoniezh, hag all... Goude dek vloaz evel kure e Gwengamp e voe aluzenner ha neuze, e 1956 e voe anvet da Berson e Louanneg. Eno e chomas betek dibenn e vuhez.

En Annales de Bretagne (1957 p. 523) e roas an docteur Cormerais un heklev eus al labour ramzel a voe kroget gantañ ha Klerg d'an ampoent : sevel ur Bibl katolik en hor yezh : "*Pobl Breizh a zo marteze ar bobl kristen nemeti na lenn ket ar Bibl en he yezh, emezañ, (...) an droidigezh-mañ a heuilh an testennoù hebraek ha gresianeg, ha n'eo ket ar Vulgata evel he diaraogerezed (...). Keuzius eo en em ziskouez alies troiennoù 'zo re ouiziezh ha kalvezadel avat. Kavout a ra deomp e vefe kavet an dro da chom feal [ouzh ar mammennoù] en ur weañ ar yezh nebeutoc'h*"

Ar rebech-mañ a zo bet graet gant meur a hini. Fañch Morvannou²⁰ hen lavar ivez²¹, hag a ziskouez mat a-hent all, ez oa "*aet-tre e relijion ar brezhoneg dre an nor-vras*", hini Gwalarn, hini ar brezhoneg "*lennek, unvanet, akademek*", emezañ c'hoazh. "*Ar c'hefredour boas ouzh Sant Tomaz Akwino ne oa ket e spered gant ar brezhoneg-pobl, livus ha skeudennek (...). Ar brezhoneg a zedenn e evezh eo an hini e c'hell diskleriañ ez eo yezh vroadel Breizh, unvanet he doare-skrivañ, he c'heriaoueg, he distagadur. Bruzhunadur ar yezh o treiñ d'ur mor a barlantoù, a lakae anezhañ da welout ur gwanadur, ha zoken azon he steuziadur*".

"Mennet start, evel evit ur c'hlaouestre, e krog da wiskañ ar yezh gant dilhad hollgaer, hep merzout e oa gwall bounner evit Luduennig, dindan samm

¹⁹ Embannet e voe ul levr a seurt-se e 1937 gant Vallée : «Gériou gallek ah brezonek reizet dioc'h ar ster», en eil levrenn e kaver ur stagadenn a live uhel-mat : «Notes sur l'Histoire de la Philosophie» p. 93-106. Karaez, Ti-embann «Armorica».

²⁰ E studiadenn war Maodez Glanndour ha «Komzoù bev» da geñver ar c'hCAPES brezhoneg 1996 (toet eo bet ganin).

²¹ Kalz a Benn-ar-Bediz eus ar rummad-se – met n'eo ket tre degouezh an daou zen madelezhus-mañ ! – ne gaver ket gras ouzh o daoulagad ma n'oc'h ket brezhoneger a-vihanik !

dilhad ken nevez. *Ur c'hefredour eo Maodez Glanndour, ne domm ket kalz e galon ouzh livusted ha laouenidigezh ur yezh diwar ar maez. (...) En em zerc'hel a ra a-gostez, war grec'hienn ar soñjoù hag ar gefredelouriezh. N'eo ket eñ a yelo "d'en em veskañ gant ar bobl", a gav dezhañ labourat eviti, koulskoude (...). Chom a rae ur prederour hag ur feizoniour. (...) etre Ebrel 1950 ha Gouhere 1952 e kaver pevar eus e bennadoù er gelaouenn «La Vie spirituelle», bet embannet a-raok e-barzh Studi hag Ober²²».*

Gant Fañch Morvannou e lezomp ar giriegezh da liveañ evel-se doare Maodez Glanndour ha n'eo ket faos penn-da-benn, anat eo. Evelkent e kredan merkañ amañ, da gempouezañ e varnadenn ne rae ket fae M. Glanndour war "ar bobl" peogwir en doa dastumet ur guchennad mat a ganaouennoù-pobl e-touez ar werin. Ha daoust ha bruzunadur ar brezhoneg e parlantoù diniver, evel ur c'helan o vreinañ dirak hon daoulagad, n'eo ket drastus ?

War ar meni "prosez"-se war al live-yezh a gaver gantañ er Bibl eo mat moarvat menegiñ ar pezh a skriv e-unan²³ : "(...) war dachenn al liderezh e fell din lavarout un dra bennak diwar-benn follennoù Kemper. Ar brezhoneg anezho a zo peurliesañ plijus ha reizh-mat. N'eo ket pinvidik avat, nag e-keñver ar geriadur, nag e-keñver an troioù-lavar. En abeg da se e tremen an droidigezh re alies, e-kichen ster gwirion al latin en orezonoù, ar gresianeg el lennadurioù, an hebraeg er salmoù. Met daoust ha savet eo bet war an testennoù a orin, pe diwar galleg hon aotrounez eskibion a Vro-C'hall, a dalv ar pezh a dalv, evel ma oar an holl ?... Pa dremen ar brezhoneg e kichen an destenn eo evit izelaat, disteraat, ha neuze ne c'hellan ket mont a-du ; n'hon eus ket ar gwir da reiñ d'hon tud ur relijion didalvoudekaet, war zigarez n'int ket speredek a-walc'h evit kompren ur ger diaesoc'h ur wech an amzer. Uhelaat relijion an dud a zo da gentañ ur gudenn a gelennadurezh, da lavarout eo, ur gudenn a vennozhioù hag a c'herioù evit o diskleriañ. D'ar c'houlz ma labouremp c'hoazh gant an Ao. Nedeleg (Doue d'e bardono !) eo en aner hon eus klasket e lakaat da zegemer ar ger salvus, ha n'eo ket un euzhvil nag ur gourvil koulskoude"

Dija ar galleg a zo techet da zidalvoudekaat al latin, met brezhoneg diwar c'halleg a zo diskenn c'hoazh war ur bazenn izeloc'h : n'eo ket se a viro ouzh beleion Gemper da soñjal ez eo mat ar brezhoneg evit ar re baour ... a spered.

Ar Bibl-mañ, 60 % anezhi, a zo bet kempennet gant Maodez Glanndour. Kredet hon eus reizhañ traoù 'zo. Nebeut. Dreist-holl e oa tregeriadurioù. Diwar lenn e destennoù, pa c'hoarveze ganeomp termal, ez

²² Er gelaouenn Comunio ivez em boa kavet ur pennad bennak gant e bluenn.

²³S & O 1972 16-17.

omp aet da sellout a dost ouzh ar gudenn, ha c'hoarvezet eo ganeomp lakaat un droienn all, feal bepred ouzh an hentyezhoù hag ouzh al latin da vihanañ, tennet diwar bibl «An Tour-Tan» peurliesañ, hag a-wechoùigoù diwar Kenvreuriezh ar Brezoneg, Guichou, Klerg (Liderezh), pe c'hoazh Koas (1897).

Ret eo lavarout ivez ez eus un diaester didec'hus na vez ket meneget hag a zo a-bouez-tre : «Ar Bobl vrezhonegerez» n'eus ken anezhi abaoe pell : abaoe m'eo rediek ar skol c'hallek ez eo desketoc'h-kalz an dud war ar galleg. Chomet int gant ur 'brezhoneg-pilhoù', hini o bugaleaj, betek o zek vloaz lakaomp, ha dre ma kresk o c'horf en o dilhad brezhonek re vihan, ez eo troet hemañ da bilhoù. Saourus eo, ya, met re baour eo evit chom feal ouzh "Komz Doue" evel m'emañ er Bibl da restañ.

Ur beleg desket bras²⁴ e voe, nac'het en defe mont da eskob - neuze e vije bet kollet evit Breizh -, arroutet-mat e oa ivez war sonerezh Breizh²⁵. E holl vuhez a seblant gouestlet da Vreizh. Roparz Hemon a reas ivez, araozañ. A-du gant Fañch Morvannou e c'heller soñjal diwar-benn Maodez Glanndour - hag ivez diwar-benn Roparz Hemon ha Youenn Olier -, emañ pell o oberennoù da vezañ disi. Roparz Hemon a savas romantoù bihan dre zever, evit pourchas danvez lenn. Youenn Olier e rebecher outañ skrivañ en e notennoù gant ur yezh blaz ar galleg ganti a-wechoù²⁶. Fañch Morvannou a lavar en e studiadenn : "(...) ar blijadur hon eus o tañva hor barzh a vez alies plijadur dic'hoarzh a-walc'h : m'eo disi ha skedus ar stumm, e vez pell da vezañ hoalus bewech. Maodez Glanndour, ha pa 'n em ra barzh, a chom ur c'hefredour. (...) p'hor sach war-zu an nec'h e c'hoarvez ganeomp koll hon anal. Gantañ e-unan, daoust ha n'en em gav ket re verr e hini a-wechoù ?»

A-drugarez-Doue e resisa F.M. "a-wechoù" !... Alies e teu brav e werzennoù gant M.G. ha pergen er Salmoù, amañ er salm 24 :

⁷ O Porzhioù kozh, digorit bras ho torojoù,
digorit, o Porzhioù kozh,
ma teuio-tre Roue ar C'hloar.

⁸ Ha piv eo Roue ar C'hloar ?
An Aotrou kadarn ha galloudek,
an Aotrou galloudek en emgannoù.

²⁴ Diwezhatoc'h e tapo un doktorelezh war ar brederouriezh skolastek en Institut Catholique de Paris, gant ar meneg « magna cum laude ». An danvez anezhañ a oa «L'intellect spéculatif chez saint Thomas d'Aquin», a c'heller treiñ evel-mañ : «Ar c'hefred-tebouezañ gant Sant Tomaz Akwin».

²⁵ Lenn ar gelaouenn Breizh 257 1980, un emziviz gant Kristian Giraudon.

²⁶ An dra-se a c'hoarveze dre ma n'en doa ket amzer da sevel e skridoù : war-eeun o skrive ouzh ar skriverezh, dalc'het gant an amzer ha gant ar fed ma teue dezhañ e brederiadennoù kalz primoc'h eget tizh e vizied war ar skriverezh !

Anat eo din en deus labouret kalz : sellout ouzh al lizherenn o a zeu ken alies ! Ha kensonneoù o tarzhañ an eil och hekleveñ eben : pORzhioù digORit dOR ; ivez GALLOUdek div wech gant emGannOU..

A-wechoù all ez int disteroc'h : ya, gwir eo. Daoust hag eñ o skrive dre zevel, sed aze ar goulenn a sav d'am spered : moarvat evit un darn, pa-z eo ken bras tachenn-emgann ar brezhoneg.

Pelloc'h en e studiadenn e veneg F. M. : "(...) *ar varzhed c'hall-se, a veze en o c'herz ur benveg akuitaet mat, en doa roet oberennoù divarvel e-pad meur a gantved. Ha neuze, ar brezhoneg... Daoust ha n'en doa ket bet, tri-c'hard ur c'hantved 'zo, un herradur yezhel re rust, pa vije bet dav ober un dihun pazenn-ha-pazenn, gorrekoc'h ?*"

Hag e ro F.M. ar respont : "(...) *anat-tre e oa dezho [tud Gwalarn] e oa berr an amzer, e oa ret labourat buan da sevel oberennoù "a-zoare". (...) Daoust ha n'eo ket "Komzoù bev" ur skouer eus an dibasianted-se ? Ar pezh a verzer eo ur striv divent, prometeek, gant disoc'hoù a bep seurt.*

(...) *Geriaoueg Maodez Glanndour a zo digredus he fonnusted-dreist. Ar gerioù a rae diouer d'an aozer, o goveliet en deus, digemplezh, hag a-vern. Ar yezh c'hlan-se, ha keltiek diouzh ar c'hoant, a zo dispar evit ur c'hlanyezhour, hogen gall-holl eo ar framm anezhi. (...) Ar pezh a zeu eus ar barzh, avat, a zo an doare m'en deus kempennet ar soniadoù, renket ar vogalennoù, stok pe distok ar c'hensonnoù, evit en em gavout, pe gant ur oberenn gaer, pe gant un dro-wenn, a-wechoù".*

Ouf ! "A-wechoù" en deus ouzhpennet F.M. adarre. Gwell a se : etre al linennoù emañ hogen merkañ a ra n'eo ket fall e oberennoù, dre vras evelkent ! Ha pa lavar ez eo "gall-holl" krouiñ gerioù pe c'hoazh argarzh ar gerioù gallek diezhomm pa-z eus gerioù kaeroc'h, ne savan ket a-du, evel-just. Ret eo ober dilhad nevez kaer d'ar brezhoneg, evel d'ur paotr yaouank pa ra e gresk, e vez prenet lavregoù brasoc'h dezhañ, pa teu da vezañ un tammig Aotrou. Ne c'hell ket chom gant e lavreg pilhaek ha re verr, gant ar vezh ! Ar gerioù n'int ket pell da vezañ ken a-bouez hag an troiennoù.

Sur a-walc'h ez eo bet kont evel-se ivez gant Maodez Glanndour, un tamm bennak, war dachenn ar Bibl : dre zevel en deus labouret war he zro, un tamm, sur a-walc'h. N'hor boa Bibl a-zoare ebet : Neuze e oa ret fardañ unan. Soñjal a ran evel-se ivez. Sur a-walc'h ez eo dre ur spered a emsaver en deus kroget en alar. Evel an holl dud o deus savet o c'hein evit ar brezhoneg en deus hen graet a-drugarez d'ur youl kreñv-tre, ur *seurt* eil relijion, evel ma veneg F.M. uheloc'h.

N'eo ket sur e oa ken donezonet-se Maodez Glanndour evit kas da benn-mat raktres ur Bibl katolik en hor yezh. Gant kred hag un dalc'husted

sebezus en deus graet avat, ken abred ha 1936 (e niverenn gentañ Studi hag Ober e krog da gempenn Salmoù 'zo). Pa varvo goude 50 vloaz a labour dizehan, en devo troet well-wazh 60 % eus ar Bibl a bezh eta, hervez hor jedadennoù.

Anavezout a rae ar gresianeg hag al latin, ha gant e labourioù war ar Bibl e rankas en em ober ouzh an hebraeg. An dra-se a veizer pa lenner an notennoù e traoñ e droidigezhioù. Evelkent e kav din e ouie Marsel Klerg ar gresianeg gwelloc'h c'hoazh egetañ. An dra-se a gomprenner pa ziazezas bewech e labourioù war droidigezhioù graet gant Klerg.

E-kichen oberennoù niverus all, embannadur ingal Studi-hag-ober, retredoù «Unvaniezh Speredel Breizh», 'Komzoù bev', hag all, e krogo abred da dreiñ ar Bibl. An dornskridoù koshañ hon eus kavet, a droidigezhioù klok, a sav da 1942. Teir gwech e adwelo e droidigezh eus ar Salmoù, "*Er Bibl ez eo an tamm diaesañ da dreiñ*", emezañ. Dreist-holl ez eo an tamm eus an Testamant Kozh a servij ar muiañ : er breviañ, na pa ve ken. Etre 1952 et 1958 e vouldo levriegoù liestennet. Troidigezhioù all ne vint ket moulllet : adkavet hon eus un dornskrid kozh eus Izaias diwar e zorn n'eo ket tre an droidigezh a zo bet moulllet gant Al Liamm kalz war-lerc'h, e 1981. Betek 1983 e labouras war e droidigezhioù : er bloaz-se e kasas kalz skridoù da gaout an "Imprimatur".

Etre 1981 ha 1986 e voe embannet Testamant Kozh "An Tour-Tan", a voe gwerzhet fall-tre. Kement-se, me 'laka, a zigalonekaas Ronan Huon, rener Al Liamm, da genderc'hel da vouldañ tammoù all eus "Ar Bibl Santel" : peder levrenn nemetken a voe moulllet en holl : an daou damm eus an Testamant Nevez, ar Salmoù hag Izaia.

E 1970, gant Embannadur "ar Pevar Aviel" e ti Al Liamm e savas bec'h etrezañ ha Pêr-Yann Nedeleg war an doare da dreiñ. Klotañ a ra gant disparti an eskob Fave diouzh ar gomision etre-eskoptiel e 1969. Ar pezh a zispartie an div gostezenn a oa e teue diaesoc'h-diaesañ treiñ an testennoù gresianek en un doare reizh en ur chom gant yezh paouroc'h-paourañ an "Terminal-Speakers". "Kenvreurezh ar brezoneg" e oa nebeut a veleien enni hag e nac'he kemer perzh en Emsav adsavidigezh ar yezh, seizet gant darvoudoù ar brezel a oa tost c'hoazh, ha kalemac'het gant ur skritur patriot ijinnet a-ratozh-kaer da enebiñ ouzh an Emsav. Nag a startijenn... foranet !!! Maodez Glanndour hag e geneiled eus Skipailh "Ar Bibl Santel" a gemere holl perzh en Emsav-se, evit kempenn ur yezh unvan, troet ouzh an dazont, ur benveg yac'h, yaouank ha kreñv. Endro dezho e oa beleien all evel Armañs Ar C'halvez, Yann Talbot, F. Kerrain, Youenn Troal, Marsel Blanchard, Ar vreudeur Breton, an Aotrou Motreff, ha meur a hini all c'hoazh moarvat.

Bennozh a c'hellomp lavarout d'an Aotrou Doue da vezañ bet roet da Vreizh ene an den-doue Maodez Glanndour, un den donezonet-dreist, na zamantas ket ouzh e boan, betek e dremenvan²⁷, evel e zaou

²⁷ Dre forzh lenn e skridoù marteze, e teu din amañ klotennoù o kensenñ : ne zamANTas/e boAN/e dremenvAN ! Na kaer eo ar

ventor eus ar rummad a-raok : Yann-Vari Perrot ha Roparz Hemon.

T. Gwilhmod

brezhoneg !

Levezon an Iliad hag an Odisea

Levezon an Iliad hag an Odisea war div oberenn deuet war o lerc'h : Mojenn Kêr Is hag ar film O'Brothers.

Oberennoù Homer, an Iliad hag an Odisea, bet aozet e tro an VIIIvet kantved a-raok Hor Salver, a zo abouez o levezon en hon amzer-ni e kalz a oberennoù, skridoù, filmoù. Hogen eveljust eo bet ret d'an aozerien lakaat an danvez a gavjont en oberenn Homer da glotañ gant mareoù, broioù, tud disheñvel. Da gentañ e vo anv eus ar mennozhioù a gaver gant Homer, ha da heul e vo studiet an diforc'hioù, ar pezh a zo bet kempennet gant an aozerien.

Dibabet en doa Homer ur penn-tudenn kalonek-tre, un haroz, Ulis e anv. Kuitaet en doa e enezenn gant ur vag da vont da vrezeliñ, en ur leuskel e wreg Penelop hag e vab. Goude kalz a avañturioù gant an toullad martoloded a oa gantañ e teuas erfin en-dro, An dodenn-se eus an haroz a zo bet adimplijet gant film O'Brothers bet aozet gant ar vreudeur Coen. Everett Ulysses Mac Gil a zo an heroz er film, ha Pete ha Delmar daou vignon dezhañ, a chom bepred gantañ. An droug-hirnez a zo ur vojenn eus Breizh hag a adkemer ivez ar mennozh-se : un den a zo aet kuit war vor o leuskel e wreg war e lerc'h.

E avañturioù an harozed-se e kejjont gant un den jentil, un diouganer dall. Ulis a oa aet da welout Tiresias, un diouganer dall ivez, a sell ouzh dazont an haroz. E degouezh ar film O'Brother, Everett hag e gamaladed a gejj gant o diouganer dall war an hent-houarn. Diouganañ a ra dezho ne gavint ket an teñzor a glaskont, met unan brasoc'h ha gwelloc'h. E Breizh hon eus Gwenc'hlan, an diouganer deuet dall en un emgann etre ur priñs kristen hag un diouganer pagan : ar priñs a doull daoulagad an diouganer pagan a zeu da vezañ dall eta.

E-touez e avañturioù niverus e kejj Ulis gant kalz a enebourien, en o zouez ar morganezed. En Iliad hag an Odisea e oa seurt krouadurioù, hanter-maouezed, hanter-laboused. Kaer-tre ez int hogen droug-tre ivez : pakañ a reont an dud o kanañ tonioù kaer-eston. Goulenn a reas Ulis bezañ staget ouzh gwern e vag evit gellout selaou anezho dizañjer. Er film O'Brothers e weler Everett hag e gamaladed o selou kanoù morganezed war vord ar stêr. E mojennoù Breizh, hon eus gant Kêr Is ur vaouez, Dahud, merc'h ar roue Gralon a dro da vorganez, nasket e lasoù un den drouksperedet, o terc'houezañ Satan, en

doa goulennet diganti digeriñ skluzioù ar gêr evit he beuziñ.

Polifem a zo ur c'haour drouk a voe toullet e lagad nemetañ gant Ulis hg e gamaladed, hag evit mont er-maez eus e c'hroc'h en em lakaas pep hini dindan deñved Polifem a yae er-maez da beuriñ. Er film O'Brothers e kaver Big Dan, un den kreñv, a zeu da vezañ born peogwir ez eo bet broudet e lagad. Hag evel Polifem e tebr kalz... Everett hag e gamaladed a zeu a-benn da vont kuit oc'h en em veskañ gant ar Ku Klux Klan, a zo evel deñved e spered aozerien ar film. Dodenn ur ramz o koll e lagad en abeg d'ur volotenn a gaver ivez e-touez mojennoù Breizh.

Doue an Ifern, Hades hervez ar C'hresianed, a oa ur c'hi trifennek, gant ul lost e stumm un naer. En Iliad hag an Odisea e teu Ulis a-benn d'e douellañ. En O'Brothers ez eus ur paotr drouk a zo aet da gi. Er c'hontrol avat ez eo hael ar c'hi e gwengel ar Gelted : Cu Cullan, Sant Tan-Gi...

En istor Ulis e weler e vignoned o treiñ da voc'h en abeg d'ur sorserez war hent an distro. E film ar vreudeur Coen e kred Delmar ez eo bet troet Pete da ranig, da heul un banne alkool a oa bet kinniget dezho da evañ. En Odisea ez eo un ampoezon an hini a oa bet roet da evañ gant ar sorserez hag e mojenn Yannig e zaou wenneg e oa bet troet ur briñsez da ranig. Ret e oa bet da Yannig reiñ ur pok d'ar ranig evit ma teufe en-dro ar briñsez en he stumm ordinal... Un tamm evel ar sorserez eus an Odisea ez eo Yannig dre ma ra e seizh gwellañ evit na bokfe ket d'ar ranig.

Heñveladurioù paot a verzer eta, awenet gant oberenn Homer. Daoust dezho, kalz a draoù ne glotont ket, hervez ar mare, ar vro, an dud.

Er film O'Brothers n'eo ket heñvel emzalc'h an harozed ouzh hini an Iliad hag an Odisea. Un tammig sot eo Everett, ne soñj nemet en e vlev, kempenn e vlev gant gomina. Un tamm pout eo e spered. C'hoari a ra troioù-kamm, n'eo ket gwall galonek na kreñv kennebeut. Hogen karantezus, trugarezus ha farsus eo war-un-dro. Ouzhpen-se ez eo bep tro dre chañs eo e teu a-benn d'en em dennañ diouzh al lagennoù pa gouezh enno ! Pete ha Delmar a zo ken a-bouez hag Everett, sot int ivez, gwashoc'h c'hoazh eget Everett. Gant-se ez eo farsusoc'h ar film eget an Iliad hag an Odisea.

Penny Mac Gill, gwreg Everett, a lak unan da soñjal e oa evel Penelop, gwreg Ulis. Hogen seizh merc'h he deus tra ma n'en deus Ulis nemet ur mab, Telemak. Er film ez eo hi drouk un tammig, peogwir ne ra forzh ebet ouzh he gwaz, ha klask a ra un den en defe arc'hant da fortunañ gantañ. Displijus eo, pep galloud a zo ganti. En « Drouk-Hirnez » n'eus ket kalz a ziforc'hioù gant an Iliad hag an Odisea, war-bouez an haroz ha n'eus ket a zoue drouk a-dreñv dezhañ hag ar fed ma n'en deus mab ebet. Evel Ulis e klasko dont en-dro d'e vro da adkavout e wreg Lenaig.

E skridoù Homer ez eo ar morganezed hanter maouezed – hanter laboused, tra ma kaver hanter maouezed-hanter pesked e kêr Is hag er film O'Brothers. Ouzhpenn-se, Everett, Delmar ha Pete n'int ket bet taget gant ar morganezed hag ez eo war vord ur stêr e kejet ganto. Er c'hontrol eus harozed O'Brothers e teu a-benn Ulis d'en em dennañ. Paket int bet. E Mojenn Kêr Is ivez ez eo bet tapet merc'h ar Roue, met disheñvel eo an istor rak n'eus anv ebet a vorganezed e penn-kentañ ar vojenn. Ur priñs diaoulek eo en deus touellet merc'h Gralon.

Evit ar pezh a sell ouzh ar c'haour (pe ar ramz), eo disheñvel ar film dre ma-z eo speredek-tre Big Dan, hag e lagad a oa bet broudet a-raok. Ouzhpenn-se en deus gounezet war an harozed. An tri c'haour eus an teir oberenn a zo tud a zebre kalz, met ne zebront ket ar memes tra : ar ramz a zebre tud, Big Dan frikoioù, hag ar c'haour a zebre deñved. Evit Hades ha Kerberos emañ disheñvel an traoù er film rak ennañ n'eo ket ar c'hi un doue hag ez eo aonik-tre hag n'eo ket un naer e lost.

Zoken ma adkemer O'Brothers darvoudoù 'zo eus oberenn Homer, ez eus bet ouzhpennet traoù 'zo. Ar vadeziant a gaver er film a zo bet ijinet gant ar vreudeur Coen : an harozed a oa er c'hoad a oa aet betek al lenn, hag eno e oa ur vadeziant. Kalz a dud a oa o c'hortoz o zro, neuze o deus graet heñvel Pete ha Delmar. Ouzhpenn-se n'eo ket pal an harozed ar memes hini hag hini Ulis. Everett, eñ, n'en deus ket c'hoant da adkavout e wreg, ha Pete ha Delmar a zo deuet d'e heul dre m'en doa prometet Everett un teñzor gant kalz arc'hant nemetken.

En ur gempenn ar film-se, o deus soñjet ivez ar vreudeur Coen lakaat politikerezh : setu perak ez eus anv eus ar K.K.K. . Pal an dud-se a oa difenn gwirioù ar re wenn, evito ar re zu a oa tud diaoulek. Dre ma-z eo un emvod sekred ez int gwisket gant un tog gwenn begek da guzhat o fenn. Kroazioù a zevont e-pad o abadennoù. En amzer-se, e oa an holl dud, pe dost, kristen mui pe vui, ha neuze kizidik ouzh an diaoul. Aon o doa outañ. Setu perak ez eus un tamm eus ar film e lec'h ma welomp ur marc'had gant an diaoul. Tommy Johnson, ur mignon da Everett, Pete ha Delmar, a ra ar marc'had-se. Da hanternoz en ur c'hroazhent eo bet graet, etre an hent mat hag an hent fall. En eskemm eus e ene e resev Tommy un donezon evit seniñ gitar. Ur vojenn eus Breizh ez eus ivez war se, met n'eus ket a bal resis. Ar marc'had a sell ouzh ur bouc'h.

Ouzhpenn lakaat darvoudoù disheñvel diouzh re an Iliad hag an Odisea, e klask ar vreudeur Coen komz eus tud brudet eus ar vro. Tommy Johnson da skouer a zo ur c'haner hag ur soner gitar brudet-tre. Plijout a rae dezhañ stil sonerezh ar Blues (Delta Blues). Met techoù fall en doa : ul lonker hag ur merc'hetaer e oa.

Un eil den pouezus ha brudet ez eus kaoz anezhañ e O'Brothers : Baby Face. Dont a ra eus ar SUA, e anv gwirion a oa Lester Joseph Gillis, hag e lezanv a oa : Georges Nelsen. Anvet eo bet Baby Face peogwir e benn a zo hini ur bugel daoust ma oa ur gangster danjerus kenañ. Marvet eo e 1934 gant an F.B.I. . Er film e vez gwelet anezhañ gant an harozed o kemer an holl arc'hant eus un ti-bank. Un emzalc'h iskis-tre en doa (er film) : a-wechoù e oa fuloret-tre, a-wechoù all o farsal, pe c'hoazh o leñvañ.

An Iliad hag an Odisea o deus awenet kalz oberennoù abaoe an VIII-vet kantved a-raok Hor Salver. Hogen daoust ma vez kemeret mennozhioù eus an oberenn-se, e chom kalz a zarvoudoù disheñvel diouzh istor Homer peogwir eo ret d'ar skrivagnerien lakaat da glotañ an darvoudoù gant spered an amzer, ar vro, hag an dud a vev enni. O'Brothers ha kalz a vojennoù a Vreizh evel « an Drouk-Hirnez » pe Mojenn Kêr Is, a ro skouerioù mat a gement-se.

Mari Gwilhmod

An Nac'hidigezh

Jezuz a ginnig dimp un Doue o timeziñ e Vab...
Kaerañ istor ar bed ! Kaerañ istor a garantez !

E Vab Jezuz a zo karour. Dimezet eo gant ur pried karet gantañ kement : an denelezh an hini eo. An istor eured-se a red evel un neudenn-aour a-dreuz ar Bibl a-bezh.

Darempredoù Doue gant an denelezh a zo un "emglev", a zo un euredenn. E Jezuz Krist, Mab Doue en em c'hraet den, an Aotrou Doue en deus

dimezet gant an dud. Priedet en deus gant ur paour-kaezh merc'h ken mazaouet gant al lamm.

Pebezh keloù mat ! Ha koulskoude, dre vras, seurt keloù ne laka ket an dud-da dridal, da virviñ. Ha koulskoude, he dije va buhez kristen ul liv all, mar bije gwelet ganin evel un istor a garantez.

Ma, ar barabolenn-mañ a ziskouez dimp, krak ha berr, ez eus istorioù all o plijout d'an dud, o plijout din-me. Hag o plijout a-grenn, pe kalz, d'an

nebeutañ.

Ar re pedet a zinac'h. Ar gouviidi a zinac'h. An dud ne glevont ket ar bedadenn, peogwir o deus traoù all da soñjal ha da ober. Ar friko n'eo ket o c'hreizenn-kendeur.

Setu an NAC'HIDIGEZH. Nac'hidigezh al lezireged. Seblantout a ra ne ouzont ket ez int pedet. Ken prederiet maz int gant o c'hudennou,

Holl, o deus abegoù, digarezioù dreist : ar park, an ejened, al labour, ar c'henwerzh, ar c'hont-bankoù.

Nac'hidigezh al lezireged... Nac'hidigezh an nagennerion. Ar re-mañ a zistaol, emouizek, ar bedadenn hag a dag mevelion ar roue. Prederiet gant o c'hoantadurioù. Re zaoubleget warno o-unan. Sanket en o frederioù. O selaou mouezhioù all. Ar re se ne fell ket dezho treiñ o chupenn war un tu all.

Hag e teuont neuze da vezañ rok, otus. En em ziwall a reont. Ne fell ket dezho bezañ horjellet. En em zifenn a reont. Ar c'halvadenn ne c'hell ket treuziñ o c'hrogen dev.

Ar barabolenn-mañ a zisklêr dimp eta e c'halv ar Roue da eured e Vab, hag e bedadennou a zo bepred a-vremañ ha bepred ingal.

Doue hag a zo Tad ne skuizh morse. Hor gortoz a ra atav. Leun-chouk e tle bezañ ar sal-friko. Sed aze reolenn ar Rouantelezh.

War an hentoù ne 'z erruer morse er penn anezho - arabat krediñ - Doue ne ehan ket da ober sin, en un doare mallus. Morse avat en un doare redius.

En Testamant Kozh, en deus an Aotrou Doue graet sin dre ar brofeded hag ar furion, en c'harg ar Gomz. Dre veleion ha levited an Neved.

En Testamant Nevez, ez eo ar Pab, an eskibion, ar veleion hag a skoazell da vevañ diwar ar C'hrist. Ez eo ivez ar vadezidi o vevañ hervez an Aviel. An Aeled ivez a vez kaset evit dougen d'an dud bolontez ar Roue Meur.

Tizhet ez omp gant galvadennoù fetis dre ar pezh a c'hoarvez en Istor. Un hinienn dianavezet selaouet ganimp a c'hell hon trelatiñ.

Gwazed ha merc'hed o tiskuilh falsdoueoù ar gevredigezh hor galv, hor poulz da zivorfilañ, da zihuniñ, hor redi da zibab.

Treuziñ a reomp un amprouadenn. Tañva a reomp ul levenez.

Evezhiadennoù, kuzulioù kerent, mignoned hol laka da fiñval.

E-gwirionez, daoust ha lavarout a reomp "YA" da c'halvadennoù dibaouez an Aotrou Doue; en hor buhez pemdeziek ?

Oc'h ober, oc'h oberiañ fall gant hor frankiz, e nac'homp. Naon ha sec'hed hon eus eus traoù all eget eus e Vanvez. O kaout hor gwalc'h gant ar pezh maz omp hag ar pezh a zo dimp.

Emaomp brav er gwasked ha ne fell ket dimp bezañ diskaret diwar hon dorchenn. Ne fell ket dimp kuitaat ar pezh a strob hor buhez, en em zizober eus hor boazioù, eus hor c'hloarded.

Atav, e kavomp un dra bennak mallusoc'h da ober eget respont dezhañ. Bez ez eus al labour, an arc'hant, ar c'hleter, ar berr-amzer, plijadurioù ar pec'hed...N'eus forzh! Gwelet e vo diwezhatoc'h ! Amzer 'zo !

Penaos mont d'an oferenn ? N'em eus nemet ar Sul evit ober mell-troad, marc'h-houarn, koroll... D'an deiz-se e krogomp da veajiñ...D'an deiz-se e ran va bitrakoù. Bet on bet er voest-noz... Va deverioù am-eus da ober...

Bez e c'hellomp kavout gwelloc'h hor park pe hor c'henwerzh eget Pried an eured. Bez e c'hellomp lakaat al labour da dremen a-raok ar gouel. Bez e c'hellomp lezel ar gwinizh evit berniañ plouz didalvez.

Bez' e c'hellomp kaout hor gwalc'h gant ar pezh a reomp, rak ni a zo tud fur.

Pegen mallus n'eo ket, en Aviel, ar bedadenn da vont e-barzh ar Rouantelezh, ar bedadenn da wiskañ santelezh ar sae-eured !

Ur galv eo d'ar re-baour, d'ar re mac'hagnet, d'ar re zall, d'ar re-gamm, d'ar re ar muiañ reuzeudik. N'o deus rakwelet netra, goulennet netra. A-walc'h eo chom hep lavarout "NANN". Int-i eo ar re a gargo ar sal hag a vezo niver bras an dibabidi, ar re salvet.

Youenn Troal

Notennoù diwar an darvoudoù *gant Yann Maneguen*

Rentet en deus **Martial Ménard** e ene da Zoue e dibenn 2016. Un debrer-beleien e oa, siwazh. Evelkent en devo – spi hon eus - gonezet e Varadoz daoust d'an oberennoù hudur en deus savet en hor yezh, rak a-hent-all, an istor a zalc'ho soñj anezhañ evel oberour ar geriadur en-linenn 'Devri', a gemer lec'h hiviziken Geriadur istorel ar brezhoneg Roparz Hemon. E-barzh Devri e lenner dour benniget a-wechoù, evel er ger «bepred», gant ar Gredo kozhañ e brezhoneg : *Me cred bepied indoe en tat crouer aneff han douar. Doe = Me gred bepred e Doue an tad crouer an neñv hag an douar, eus 1456. Bepred =*

Bep pred = E pep pred, pep mare. Na kaerat kavaden ! Kement-se a dalvezo da Vartial un induljañs bennak da guitaat e «Varadoz vihan»-strizh.

Skol-Uhel ar Vro he deus kinniget d'an dud dibab **ur blantenn-arouez evit Breizh**. Tost da 800 respont a zo bet : al lann eo a voe meneget ar muiañ. Setu sifroù ar plant kinniget 10 gwech pe muioc'h : al lann 207 gwech ; ar brug 96 ; an ortañsia 74 ; ar balan 74, ar gwinizh-du/an ed-du 25 ; an ortañsia glas 14 ; an armor 12 ; an artichaod 11 ; focon-ar-Glenan 10. Ar Brug en em gav da eil, evit un darn abalamour da

vrud «Ar Bleun Brug» emichañs, a reas kement a verzh e-pad an etre daou vrezel-bed, un ensavadur emsavel kristen ha brezhonek n'eus ket bet par dezhañ abaoe.

Ur skol er-maez kevrat nevez evit ar Baotred a zo nevez digoret e kastell Pont-Kalleg Ploue. Ar skolaj er-maez kevrat e Brest e konter ennañ 11 bugel er 5^{vet} klas. Peur e vo skolioù er-maez kevrat katolik e brezhoneg : Youenn Olier a ziougane an dra-se e dibenn e vuhez.

E pevar departamant rann-barzh **Breizh ez eus muioc'h a verventi eget a c'hanedigezhioù evit ar wech kentañ** en ur marevezh a beoc'h. Etre 2006 ha 2013 n'eo ket kresket er vro ar C'henderc'hadur Diabarzh Kriz (PIB). E Frañs ez eo kresket a zaou dre-gant. E Pariz : 9% a gresk, muioc'h eget en Alamagn (OF 2.2.17). **E poblañs Frañs e koazh ar feur frouezhusted** : an eil bloavezh eo 2016 ma weler niver ar ganedigezhioù o tigeskiñ (785 000 e 2016 e-skoaz 800.000 e 2015 hag 820 000 e 2014). Ar feur fouezhusted a sav da 1,93 bugel dre vaouez (2 vugel e 2014). Daoust da se eo kresket ar boblañs a 265 000 annezad. Ar soldad enbroañ a sav da 67 000 den. 587 000 zo aet da anaon (785-587-67=265 k-annezad). En ur ober dek vloaz ez eo kresket a dri dregant lodenn ar re gozh er boblañs : ar re a zo a-us da 65 bloaz a sav da 19,2 % e dibenn 2016.

Notomp ivez e oa bet 218 097 ~~ene drouklazhet e kof e-mammoù~~ IVG e 2015, hag an enbroadurioù er-maez lezenn a vras-jeder en-dro da 200.000 ne zalc'her ket kont anezho er sifroù-se.

Disoc'h bloavezhioù drastus a zivizoù a-enep ar broioù paour a wel o begenn ouzh o c'huitaat, a-enep an tiegezhioù, falskealiadurezh ar Gender, hag a-enep ar vuhez o c'henel ez eo ar sifroù-se, a dra-sur.

Adalek ar c'hentañ a viz Genver e c'heller **torrdimeziñ hep tremen dre al lez-varn**. Tra-walc'h e vo d'ar priedoù tremen dirak un noter gant o advokaded, evit un «torrdimeziñ kenasantet». En em gavout a ra dezvad an Tiegezh breskaet muioc'h c'hoazh : evel ur c'hleenex eo deuet da vezañ ar stad a briedelezh e Frañs, hiviziken, gant bennozh maodiern ar justis, ar C'hemperad J.J. Urvoas, a zo deuet a-benn da dizhout ar galloud dre zegas d'an Aotrouig Hollande mouezhioù kleizelour an Emsav e 2012.

Er gelaouenn skiantel *The Journal – The New Atlantis* eus an 23 a viz Eost, e tiskouez daou skolveuriad brudet ez eo taget izili ar «gumuniezh» LGBTXYZ gant kudennoù bredel kalz muioc'h eget an dud ordinal. Diskouez a reont ivez **n'eus prouenn skiantel ebet o tiskouez e vije tud o c'henel heñvelrevourien**. Ar gredenn e vije an durc'hadur revel un dra bevoniell distag diouzh ar reizh bevoniell n'eo ket prouet kennebeut. N'eo ket prouet e c'hellje bezañ «ur vaouez bac'het en korf ur gwaz». Anzav a

reont ez eus un niver izel-tre a vugale e c'hell kaout emzalc'hioù amrizhek na glotont ket gant o rev, hag a gendalc'h da vezañ evel-se en o amzer-krennard ha -gour. Met diskleriañ a reont n'eus prouenn skiantel ebet a lavar e ranker broudañ ar vugale-se da dreuz-genañ ha ne gomzer ket aze a reiñ louzeier hormonel pe a oberataerezhioù surjanel da gemm rev... Siwazh, dre al lezenn eo e reer d'an dud degemer an amoadajoù-se, dre hantererezh mennozhiañ ar «gwallziforc'herezh» : e broioù-se ez aotreer evel-se gwazed da implij privezioù, salioù-strinkellañ ha salioù-kemm-dilhad ar merc'hed. Hep diazez skiantel ebet ez eur deuet da dremen lost al leue dre c'henou an dud ! Evit gwir **an dud ha n'int ket arallrevel a ziskouez ur feur kudennoù revel (anken, gouvid, emlazhañ), ha kudennoù emzalc'h (drammoù, feulster gant o c'hevelerien) klaz uheloc'h eget an dud ordinal, emezo**.

Ur skiantour all, Lisa Diamond, ur vezegez eus an American Psychological Association (APA) a lavar **ez eo hever (fluide) an Durc'hadur revel** : bez e c'hellfe kemm. Dre se ar c'heal a ziskleir «ne c'hell ket kemm un heñvelrevour» a ya da netra neuze, ret eo bezañ poellek. Er c'h/Cornell University he deus diskleriet ez eo deuet hiziv an deiz an durc'hadur revel, an desachadur revel, an emzalc'h revel hag an hennadelezh revel, holl ez int deuet «hever» evit ar grennarded hag an dud gour eus an daou reizh». Daoust da se ez eo berzet gant lezennoù, en Ontario da skouer, an terapiezhioù da sikour an dud a fell dezho stourm ouzh ar bondougoù-se, rak diazezet eo al lezennoù-se war digemmusted an durc'hadur revel, daoust ma-z eo diskouezet splann bremañ n'eus prouenn skiantel ebet d'ar mennozh-se.

E Frañs emeur o paouez reiñ lañs d'**ur c'houlzad-brudañ a-du gant gwengeloù an LGBTXYZ** : skoazellet gant ar riezstad gant he meziennoù hag he Deskadurezh-Stad e treistvevo ar gevier drastus-se evit an dud wan. Hollveliouriezh ez eo, na mui, na maes. Pep tachenn a vo evezhiet ha kastizet hiviziken : ar skol, ar skol-veur, an amaezhiezh, ar c'harterioù «tomm», an embregerezhioù ivez ! Rakwelet eo kas en un doare emgefreak d'ar prokolor ar c'homzoù a gasoni a vo kavet war internet. Evel evit an IVG e vez lakaet e plas ur polis-da-soñjal-reizh evit berzañ ar gwir da soñjal.

Un toullbac'h eo deuet Frañs da vezañ ! En 2016 e oa bet kondaonet Christine Boutin, bet kannadez hag e penn ar Parti chrétien-Démocrate evit bezañ graet gant ar ger «abominable» - euzhus – en ur gomz eus ar gread revel heñvelrevour. *"L'homosexualité est une abomination. Mais pas la personne. Le péché n'est jamais acceptable, mais le pécheur est toujours pardonné"* (Un euzh eo an heñvelrevouriezh, an den n'eo ket avat. Degemer ar pec'hed ne c'heller ket, e degouezh ebet, ar pec'her a vez pardonet atav avat.). «Ar pezh a glever en ho komzoù a zo e vije un euzh an heñvelrevourien» a lavaras dezhi ar prokolor.

Resevet en doa 500 lizher-klemm. Meur a dra a zo da lavarout : 1°) N'eo ket gwir ar pezh a lavar an Itr. Boutin war bardon ar pec'hedoù : ne vezont ket pardonet ma ne c'houlenner ket gant keuz ha c'hoant da rapariñ ha da gemm. 2°) Ar glemmerien ne reont ket ar c'hemm etre ar greadoù hag an hini a ra anezho 3°) Ar barner n'en deus ket barnet reizh peogwir ne oa ket he mennad kondaoniñ an dud met burutellañ greadoù. 4°) Hollveliouriezh c'hall adarre.

Stad ar gloer e Breizh e derou 2017

Stad ar gloer e Breizh e derou 2017	22	29	35	44	56	En holl
Poblañs (miliadoù)	597	904	1020	1330	738	4589
Beleien gozh	74	115	88	147 (?)	83	<> 500
Beleien e karg	79	122	243	190 (?)	182	<> 800
Beleien o chom en eskopti	153	237	331	337	265	1323
Diagoned «padus»	32	39	40	56	57	224
Keidenn ar boblañs dre veleg e karg	8067	7861	4200	7000	4054	<>5660

An holl eskoptioù a ya buan war ziskar. Eskopti Gwened en deus urzhiet 24 beleg e-pad an eizh bloavezh tremenet, ur geidenn a 3 bep bloaz (7 e 2016), tra ma n'eus nemet unan pe hini ebet a-wechoù en eskoptioù all. Stad eskopti Sant-Brieg eo an hini nec'husañ. Adframmet eo bet e 7 deaniezh ha 53 parrez. E Penn-ar-Bed e oa bet adframmet an eskopti e 73 parrez e 1996 : adframmet e vo dizale da ziskenn da ... 22 parrez.

E 1959, ne oa nemet 9 farrez hep person (war 337). Bez e oa 35 beleg evit melestrerezh an eskobiezh, 575 beleg er parrezioù, 232 o kelenn, 53 aluzener er-maez eus ar skolioù, 64 war o studi pe oc'h ober traoù all, 100 war o retred, en holl : 1059 beleg war an dachenn. Ha pa gonter ar 1127 beleg a oa bet ganet en eskobiezh Kemper o chom er-maez eus an eskobiezh (69 en Haïti, 191 e eskobiezhoù all, 867 misioner pe en urzhioù leanel), en em gaver gant 2180 beleg. 20 beleg nevez a oa bet urzhiet e-pad ar bloavezh-se. E berr gomzoù e c'heller lavarout ez eo bet rannet dre zek niver ar veleien en ur ober 60 vloaz, gant 180.000 annezad ouzhpenn e 2016. Daoust ha chom a raio Kristenien e Breizh pa zistroio an Aotrou Krist ? Mat e vo atav ober alies gant ar bedenn-mañ da heul, ar bedenn da Itron-Varia ar Veleien :

Itron-Varia, Mamm ar C'hrist-beleg,

Mamm beleien ar bed a-bezh, karout a rit kalz ar veleien, dre ma skeudennont ez-vev ho Mab-unganet.

Sikouret hoc'h eus Jezuz dre ho puhez a-bezh war an Douar,hag e sikouret anezhañ c'hoazh en Neñvoù.

Hoc'h aspediñ a reomp : pedit evit ar Veleien ! Pedit an Tad a zo en Neñvoù evit ma kaso labourerien war e east. (Mazh 9, 37)

Pedit evit m'hor bezo bepred beleien da reiñ deomp ar Sakramantou, da zisplegañ deomp Keloù Mat ar C'hrist, ha da gelenn ac'hanomp, ma teuimp da vezañ gwir vugale da Zoue !

Gwerc'hez Vari, goulenniñ hoc'h-unan digant an Tad ar veleien hon eus ezhomm kement anezho ; ha peogwir he deus ho Kalon pep galloud warnañ, grit m'hor bezo, A Vari, beleien santel, ha sent war-un dro ! Amen !

Merzherien Vreizhat Bro-Laos.

E miz Kerzu 2016 e oa bet lakaet war an aoterioù 17 merzher gwenvidik, bet lazhet dre garantez en abeg d'o feiz e bro Laos er bloavezhioù 50-75. Tri beleg a orin a Vreizh a gaver en o zouez : **Jean-Baptiste Malo**, eus Gourgenew, etre Blaen ha Nozieg ; **Jean Boissel**, eus Lavreeg-an-Dezerz, tostik da Bont-Maen e bro-Felger ; **Visant Enored**, bet ganet en un tiegezh kristen ha brezhonek a bemzek bugel e Pont-'n-Abad e 1921, bet urzhiet e 1946, ha bet lazhet war e varc'h-houarn, un dennadenn en e gein, p'edo o tistreiñ d'e vision goude bezañ bet lavaret an Oferenn e miz Mae 1961. O zri a zo bet degemeret war roll ar sent dre m'int bet lazhet « in odium fidei » (dre gasoni ouzh ar feiz). Ur pevare n'eo ket bet degemeret da verzher avat : **Alexis Guéméné**, ur breur eus urzh Obladed Mari Dinamm (OMI), bet lazhet ur miz war-lerc'h. Niver ar Gatoliked e Bro-Laos : e 1900 e oant 9.000, 34.000 e 1977, 45.000 e 2000, ha 103.000 e 2013.

Trugarez d'ar re o deus kaset ho skodenn evit 2017 (18 €). Un nebeut n'o deus ket graet c'hoazh, Anaoudek e vefen outo d'henn ober dizale evit aesaat din al labour-merañ. Trugarez dezho en a-raok. Yann Mikael

Mererezh :

18 €eo ar skodenn emezelañ da EAT a ro ar gwir da resev *Kannadig Imbourc'h* . Talet e vez e penn-kentañ ar bloaz (pemp kasadenn da vihanañ). Ar chekenn a zo da gas war anv **EAT** pe **Imbourc'h** da : E.A.T., c/o Yann MIKAEL 12 straed René Giraud 44130 BLAEN - Roll an niverennoù pe oberennoù n'int ket c'hoazh diviet a c'heller kaout o skrivañ pe war : <http://emglev.wordpress.com>

Skridaozerezh :

Ar pennadoù a zo da gas da : jean-mariemichel@neuf.fr , pe dre ar Post da rener Kannadig Imbourc'h : Yann MIKAEL, 12, Straed René Giraud, 44130 BLAEN. Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re o deus skrivet anezho. Moullet ez-prevez gant an embanner : **Emglev an Tiegezhioù** Kergreven 29800 Trelevenez. ISSN : 1144 357X